

AVEL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAÑ (9)

Imramiñ gant Gwalarniz. Da heul an imramer meur a oa eus Maodez Glanndour. Taranadenn krouidigezh Gwalarn he devoa staliet un diawelad mezevennus. Kristinennañ gant bili-mor hon yezh, skejañ an dour gant hon memor boull ha sklaer ha kas bili hon istor en tu all d'an dremmwel, en tu all d'an touellwel dispis d'ar reoù na welont ket penaos eo digor frank hon bed, hon ijin, hon c'hrouiñ, hon awen. Imram Maodez Glanndour, roeñvoù savet, gouelioù c'hwezet, kouc'h al lestr o parstrakal, ar porzh o steuziañ da vat en diabell, zo aze evel ur ganenn, kanenn ar vuhez, kanenn ar spered, kanenn ar varzhoniezh. « Ar gwerzaouiñ a zo dreist-holl labour-sonerezh. Hag amañ, troioù micherel ar sonerezh a c'hell, kalz anezho, talvezout er Varzhoniezh. (...) Hevelep levezon ar sonerezh war va doare da sevel luskadoù, evel ma reer evit ur gensonadeg pe ur c'honserto. Nag Imram, na Milc'hwid ar serr-noz, nag an Telenngan d'an teir Vertuz, nag ar re all, n'heller o c'hompren hep derc'hel kont eus an dra-se. Pe vat pe fall va mennad ? N'ouzon ket, d'al lenner da varn. Met dav eo dezhañ en gouzout, mar ne fell ket dezhañ tremen e-kichen hep gwelout. » Eme Vaodez pan grede displegañ e skritur. Skritur vat a rae e varzhoniezh, kreskaat hon lennegezh, didamant, divezh, lorc'hus ha kizidik war un dro.

« Gouzañvet hon eus ha setu perak marteze ez eo chomet bev ennomp hon ijin hag hon nerzh-kalon. », re wir ar pezh a skrive en e notennoù personel. Ar gouzañv, ar striv da viret hon awen ? Lod a lâro eo diouzh un doare soñjal boutin en kornôg Europa, marteze, koulskoude n'eo nemet ar wirionez wir (trugarez Jañ-Mari evit an droienn !). « Ar pezh a glaskomp eo mont e-barzh ar gwirvoud da welout ar pezh na wel ket ar re all, da glevout ar pezh na glevont ket. Rak seul vuioc'h ma tizhomp buhez diabarzh ar bed, ene boemus an traoù, seul vuioc'h en em santomp en tu-hont d'an didalvoud, en un aergelc'h achantus ha war un dro damspouronus, dirak ur c'hevrin. » a skrive, didroidell ha reizh, da ginnig barzhonegoù Ronan Huon. Ur skrid diazez da gompren pal ar varzhoniezh vrezhoneg dindan Walarn, hini hon Ronan, da gentañ-penn. Ronan ne oa ket faziet : eñ ivez a rae gant gerioù eeun da ezteurel kammdroioù ar preder, gwidiladennoù hon drivliadennoù.

Imram, ar ger sakr, e kement ster zo tout. A soñj din. Kuit a ober gant ar ger merdeadur, re dost d'ar striv ha d'ar gouzañv.

Sede introibo Maodez Glanndour d'e veaj hir ha n'eo ket morse bet echuet. Eñ hag a lâre ne blije ket dezhañ kuitaat e gêr. Un douaroniezh all, ur merdeñ a-dreuz inizi hon istor personel, met sur ivez, a-dreuz inizi istor hon pobl :

« Kriz, put da skrij, Avel rip !
 Nann ! Na zeu ket adarre d'am nec'hiñ,
 Pa'z eo din ken brav goudor ar porzh lor !
 Â, perak dont c'hoazh da c'hwezhañ em gouelioù
 Da chalañ va c'halon gant da c'halv ?
 Netra ken ne van da gavandenniñ er bedoù arvarus,
 Ha pep soñj ez eo bet diskuliet e zoare.
 Perak va boureviañ gant bount ar c'hoant ?
 Va lez d'ober 'vel ar re all
 A vev sioul, diyoul, he n'eus evito kudenn ebet.

- Tav ha sav !
 Na c'harm ket, ne vern dit,
 Peogwir ez out din hag ez i hervez va soñj.
 Gouzout mat a rez ne c'hell da galon teurel an eor
 Na diskenn he gouel, stegnet bepred, ledan, o stlakal.
 Te eo va bag hedro
 A luskellan pa garan,
 A vountan pa garan,
 Hag a zo kizidik-flour d'am anal evel dremm an dour.

Daoust ha ne chomfe ket broioù speredel da c'hounit
Lec'h e tregern mouezh taer ar ger,
'Vel hini ar vombard eilet gant taboulinoù,
Mouezh tener ar ger
Evel kammedoù skañv war an tonnoù.
Kae koant, hervez va c'hoant. »

Sonerezh ar gerioù evit o sonerezh na dalveze ket kalz a dra evitañ : aze e oant evit gervel an trivliadennoù, ar gizidigezh int gouest da bourchas dimp koulz en hon buhez pemdeziek koulz en hon memor labezet ha gwariet. Hag emaint aze bepred.

« Liesstumm eo an douar hag an neñv ne welomp ket e dermen, ha n'eus netra ken trellus ha fiñvus ha lagad ar mor. Met perak ken kalet an douar, hag ar mor ken c'hwerv, an neñv goullo. Mar befe un neñv ennañ liesdoare an traoù, ha didermen, ha trellus war un dro evel lagad ar mor. » (Troellennoù Glas)

Ar gizidigezh, ar sell war ar vuhez, ar pred bevet. Joaiusaat ha testenian :

« Delioù rous an diskaramzer
A droidell war an avel.
Hag e ve dit ur c'hoariell
Kazhig bihan gwisket en gwenn
A lamm warno a bav digor ? »

Pe c'hoazh, ar berlezenn, ar pezh-oberenn a chomo da viken war roll hon lennadennoù.
Lennadennoù ? Nann war roll ar sonerezh ken fromus ha ken gwirion a rankfemp selaou outi, kloc'h hon daoulagad, digor-frank hon awen hag hon ijin :

« Hag-eñ eo diskennet en noz,
Elerc'h gwenn-kann an hanternoz,
Hag e kouskont er mor, morzet,
Pleget o fenn dindan o fluñv.

N'eo ket elerc'h, an erc'h
A zo kouezhet askellek en enezeg.
N'eus en aber met rec'hier
A huñvre kuñv dindan o fluñv. »

« A huñvre kuñv dindan o fluñv » : un dornad gerioù, un dornad gerioù o kenganeziñ gwidilus en despet dimp, en despet d'ar reolennoù. Ne vern. « Ar gwir varzhoniezh a vo lavarout ar speredel dre an danvezel, en doare ma splanno ar speredel a-dreuz d'an danvez. » Ar ger diwezhañ, ar ger heson, leun a varzhoniezh hag a sonerezh a chomo gant Maodez... da vat. Ha gwell a se evit hon lennegezh. Bezañ eo e hent an denelezh en e varzhonegoù, da lârezh Annaig, ur vignonez karet ha skedus, aet kuit diouzhimp re abred. Linenn dec'h en daolenn liesliv hon lennegezh...

Herve Bihan

Levrlennadur

Maodez Glanndour, Imram (Merdeadur), Sterenn, Niv.1 Genver 1941.

Maodez Glanndour, Kregin-Mor, Al Liamm, 1987.

Maodez Glanndour, Dre Inizi ar Bed Keltiek, Al Liamm, 1991.

Maodez Glanndour, Komzoù bev, Skridoù Breizh, 1949 [adembannet gant Al Liamm, 1985]

Maodez Glanndour, Troellennoù Glas, Gwalarn, Niv. 109, Kerzu 1937.

Annaig Renault, Maodez Glanndour, Son chemin d'humanité au long de Komzoù Bev, Mouladurioù Hor Yezh, 2008.